


PEDENN VINTIN

Ton " M'hoc'h ador "



1. M'hoc'h a - dor, Dou - e, va c'hrou - er, M'hoc'h a - dor, Je - zuz, va Zal - ver;
2. Mil ben - noz deoc'h, o va Ao - trou, E - vid hoc'h oll ma - do - be - rou:
3. Ke - ment a rin, a la - va - rin, A c'hou - zañ - vin hag a zoñ - jin,
4. Sel - lit ou - zin, o va Je - zuz, Skuil - lit war - non gra - sou ner - zuz,
5. Gwer - hez Va - ri, va mamm de - ner, Be - zit a - tao mad em c'heñ - ver



1. Me 'zo am - (m)añ war va daou - lin 'Vid ho pe - di diouz ar min - tin.
2. D'am be - za grêt, pre - net, mi - ret, Hag en hoc'h i - liz ke - me - ret.
3. A gin - ni - gan e - vid ho kloar, Keid ha ma vin war an dou - ar.
4. Ha dreist pep tra, grit ma vo don Ho ka - ran - tez 'barz va c'ha - lon.
5. Ha pa zo - no eur ar c'hi - miad, Deut da glo - za va daou - la - gad.

1. M'hoc'h ador, Doue, va c'hrouer,
M'hoc'h ador, Jezuz, va Zalver;
Me 'zo amañ war va daoulin
'Vid ho pedi diouz ar mintin.
2. Mil bennoz deoc'h, o va Aotrou,
Evid hoc'h oll madoberou :
D'am beza grêt, prenet, miret,
Hag en hoc'h iliz kemeret.
3. Kement a rin, a lavarinn,
A c'houzañvin hag a zoñjin,
A ginnigan evid ho kloar,
Keid ha ma vin war an douar.
4. Sellit ouzin, o va Jezuz,
Skuillit warnon grasou nerzuz,
Ha dreist pep tra, grit ma vo don
Ho karantez 'barz va c'halon.
5. Gwerhez Vari, va mamm dener,
Bezit atao mad em c'heñver
Ha pa zono eur ar c'himiad,
Deut da gloza va daoulagad.

PRIÈRE DU MATIN

1. Je vous adore, Dieu, mon Créateur ;
Je vous adore, Jésus, mon Sauveur ;
Me voici à genoux
Pour Vous prier dès le matin.
2. Mille fois merci, mon Seigneur,
Pour tous vos bienfaits ;
Vous m'avez créé, racheté, protégé ;
En votre Eglise, Vous m'avez accueilli.
3. Toutes mes actions, mes paroles,
Mes souffrances, mes pensées,
Je les offre pour votre gloire,
Tant que je vivrai sur cette terre.
4. Regardez-moi, o Jésus,
Répandez sur moi d'abondantes grâces,
Et par dessus tout, faites que soit profond
Votre amour au fond de mon cœur.
5. Vierge Marie, ma tendre mère,
Soyez toujours bonne envers moi,
Et quand sonnera l'heure des adieux,
Venez me fermer les yeux.